



Photo Charrouin, Saint-Pol-de-Léon

Uwen  
SON

# ar Sant-Philibert

War eun ton anavezet



I

Kuiteat o doa eur zulvez vintin  
Kear Naonet vit mont da bourmen  
War ar pount e zoa tud o c'hoarzin  
**K**alz re all a gane a vouez penn  
E vont da bourmen  
Ez edon laouen.

DISKAN

En distro e teuaz eun taol amzer  
Ar mor a ioa dirollet  
Paket e kreiz ar gwall amzer  
Ar Sant-Philibert zo bet kollet.

II

Gretfec'h ket pebez tristidigez  
**K**levet penaoz 'z oa an dud spountet  
**K**alz a ioue c'houlouen ho buez  
Gwelet reent ez oant tud kollet  
**K**alz ioa war an dour  
O c'houlouen sikour.

DISKAN

Siouaz ar mor a ioa dirollet  
'Vel ma noa ket gwelet pell-zo  
Ha pemp kant den a zo bet beuzet  
Heb gallout kass sikour dezho.

(Reproduction interdite).

III

Pebez ran galon ez oa klevet  
**K**lemmou an dud o vont da vervel  
Bugaligou, goazet ha merc'het  
A lavare a vouez huel:  
Truez va Doue  
Ouz ho pugale.

DISKAN

Siouaz ar mor a ioa dirollet  
'Vel ma noa ket gwelet pell-zo  
Ha pemp kant den a zo bet beuzet  
Heb gallout kass sikour dezho.

IV

Breman vit sikour ar familiou  
Zo warnho ar malheur erruet  
Goulouen a reer aluzennou  
Vit kass d'an dud a zo glac'haret  
Pinvidik, peurien,  
Roit an aluzen.

DISKAN

Bretoned, c'hui gemero truez  
Hag a sikouro an dud keiz  
Diskouezit penaoz en ho parrez  
O peuz eur galon en ho kreiz.

Francis MOAL.